

Ar minor hag ar minores.

eur minor deus ar ger man
zo ed d'ober al lez
Da eur vinorez iaouank
Deus a gichen montroulez.

eun dervez goude koan
e komeras e vas
e treuzek ti er verstre (1)
en eur bourmen e ias.

Pa voa erruet e kichen an or
he c'houlene digor
Digoret a voa dezan
antren a ras en ti.

Pa entreas ebars en ti
e voar e tujuni
e vestres a voa e neza
e padas (2) d'asseza

Da azzeza en e c'hichen
an amser a voa ien.

en avis farsall outi
Diskaras e gwerzit
ag hi o sevel promptament
gant eun air different.

— neket red deoch beza ker different
evidoc'h beza koant.

Ker koant a c'houi a zo er vro
mar karan em bezo.
maoc'h partout e lavaret
e meus o goulennet.

ne meus ket affer ac'hanoc'h
a balamour d'ho mam

e man partout o lavaret
e meus o goulennet

Ne meus ket o koulennet(3)
na no goulennin ket.

me tenffe kentoc'h bleo ma fen
kent teufen d'ho koulen.

en an Doue Den iaouank
Bleo o pen na tenit ket.
C'houi kavo, me rei ive
P'or bezo bolonte.

Jannton Puil, 16 juin 1851.

(1) Ms : *verstrez* ; lire : *vestrez*.

(2) Ms : *padas* ; lire : *pedas*.

(3) le k est écrit en surcharge sur un g.